

# RÉPUBLIKANED

(POTRED AR GOMMUN)

## O KLASK BOÉD TÉO



Sur l'air de : *Je suis natif du Finistère.*

Chétu eur stal Républikaned,  
A viskoaz béd eur stal fentuz ;  
Dizao meurbéd ho deuz goulenned  
Eunn dra, wid gwir, d'ann holl tentuz

Eunn tamm boéd téo,  
Boéd téo bemdé,  
Da veuré, da grésté, da nôz ivé ;  
Hénnez éc'h eo ho mennad ; } bis.  
Reit-han d'he héb dalé.

Ho c'hôf ô vond da nétra 'zantont ;  
Souden n'ho déo kén dalc'h brago ;  
N'eo kéd héb rezon é c'houlennont  
Ma vo stlapet gand ho géno  
Eunn tamm boéd téo, etc.

Liou ar galéo enn ho c'herc'hen,  
Ha prést da gwéa euz ho za,  
E vranskellont war ho diou vrochon ;  
D'ho zintra eo poent bráz oza  
Eunn tamm boéd téo, etc.

Pélec'h 'ta eo chomed ar boéd téo ?  
A dra zûr c'hoaz n'ho deuz kéd béd ;  
Martézé 'vo boéd tano dévo ;  
Mez ô c'houlenn na skuisfont kéd  
Eunn tamm boéd téo, etc.

Eun tol-man véfont kéd reuzeudik :  
Dilezet 'vo al labourio  
Ewid krial : « Viv la Républik ! »  
Ha zûr ac'hané é teuio  
Eunn tamm boéd téo, etc.

Evel politiked aneudek,  
Dré-holl é rafont jabadao ;  
Ha mar teu da vâd ar votadek,  
Ewit-he ar vué 'vo brao

Dalc'h-mâd boéd téo, etc.

Ho zroad er skleug é larfont : « Holla ! »  
Da c'houarn 'vo réd ho lézel ;  
Ober a rafond euz ho gwella  
Ewid tapoud arok merwel

Eunn tamm boéd téo, etc.

Neuzé héb-mar ar botred diskuiz  
A grogo stard a zéo, a glei.  
Pétra dalvo komz d'he a iustiz ?  
Ar ré ho déo a rénko rei !!!

Eunn tamm boéd téo, etc.

Chélaoued 'ta tud a gonfianz  
(Zé n'eo kéd kojo mammik koz) ;  
Mar konted c'hoaz war ho c'honsianz,  
Na véfont kén pell ô c'hortoz

Eunn tamm boéd téo, etc.

Da bép koulz eo kazuz ar brézel :  
Gand ar c'hrenva éc'h a ar c'hrog ;  
Reudi 'réfed ho pewar ézel,  
Ma n'ho pé kéd eun tol arok

Eunn tamm boéd téo, etc.

Gret gand unan ô chom diou leo enr tu  
all da vro ar bara.